

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

57. AR KLOAREK DIMEET D'HE VESTREZ

(follenn 190)

Kenta ma velis ma mestrezik e voa er sall o dansall
 en e dreid eur botou lijer gant eur bazou inkarnall

- Debonjour dec'h, greg ancien, debonjour dec'h a laran
 Konjes d'ho merc'h da zimizi digan ec'h a goulenan.

- Nag el leal, kloarek iaouank, kid da goulen gant he zad
 Gant he zad kit-tu da c'houlen zo er jardrin ho pallad

- Debonjour de/c'h, ozac'h ancien, debonjour deoc'h a
 laran
 Konjes do merc'h da zimizi digan ec'h a c'houlenan.

- Va merc'hik a zo iaouankik er bloa man da veza demezet
 Mar karet dond da vla d'he c'haouet choui ne veot ket
 refusat

- Ma na mes ket hanei dar vloa man vid da vla me nen bes
 Rag tost eo dija an termen din da vea beleget.

Na dallit-tu, kloarek iaouank, na dallit ho mouchouer
 Tri verad goad a zo henan evid donnet do dilezel.

Na dallit-tu, kloarek iaouank, na dallit ho karante
 evid nem bo ket a vallochou o temeñ va bugale.

vvvvvvvvv

Jannet Puill, 14 janv. 1851

vvvvvvvvvvvvvvv